



Salud deoc'h !

Saotret e vez dourioù park natur mor an Hirwazh (PNMI) lies gwech gant an nitratoù hag a zeu eus an hañvouez. Alies e vez difennet kregina d'an neb, pe vefe a-vicher pe evit an dudi. Abalamour d'an dra-se e vez apliket ar berz da skuilh hañvouez dindan 500 metrad d'an nebeutañ eus an takadoù kreginerezh ? N'eo ket un abeg mat da soñj tud ar park hag e brezidant, Maël de Calan, hag a ro aotreoù forzh pegement d'al labourerien-douar. En desped da gevredigezhioù an endro hag a soñj e cheñch pal kentañ ar park, hag a zo gwareziñ ar mor. 👉

Roll pennadoù ho lizher-kelaouiñ miz Ebrel

- 🚜 E dourioù troubl park naturel mor an Irwazh
- ✍️ Ar c'hehentiñ o klask en em silañ e Wikipedia
- 🗣️ Atersadenn gant Nicolas Legendre
- 🗺️ Enklaskoù foran tost diouzhoc'h
- 📅 Deizataer *Splann !*

E park naturel mor an Irwazh eo ken bresk demokratelezh an endro hag ar vevliesseurtes



Dirojañsoù skuilhadegoù hañvouez, astenn kreier-moc'h, mod divoull da verañ ar metoù dour... *Splann !* he deus splujet e dourioù troubl park naturel mor an Irwazh (PNMI), he c'hefridi gentañ eo gwareziñ an danvez en takad-se anavezet evit pinvidigezh vras he bevliesseurtes.

« *Sikour da wareziñ hag anavezout muioc'h glad ar mor* » ha « *kas war-raok diorren padus an obererezhioù micherel ha reoù an dudi* », setu pal **parkoù naturel ar morioù**. E 2007 e oa bet krouet an takadoù mor gwarezet gant lañs ar « Grenelle de l'environnement ». Eizh takad mor gwarezet a zo e Bro-C'hall, reoù an Drom-Com en o zouez, hag unan nemetken e Breizh : hini **park naturel mor an Irwazh (PNMI)**. Gant ur budjed a 950.000 euro bep bloaz e implij 21 den. En em astenn a ra eus bae Douarnenez betek ar Pays d'Iroise, en holl 350.000 hektar war vor.

Gant ur c'huzul merañ e vez kemeret divizoù hag alioù ar park. Ennañ e kaver 6 dileuriad eus ar Stad, 10 dilennad lec'hel, 9 skiantour, 12 dileuriad eus an obererezhioù micherel (pesketa ha labour-douar), 8 evit re an dudi ha 2 eus kevredigezhioù an endro. Renet e vez ar PNMI gant prezidant departamant Penn-ar-bed hag abaoe 2021 ez eo Maël de Calan hag a zo e penn an traoù.

Meur a interest kontrol a zo ha se zo kaoz ma vez bec'h kenetrezo alies ha start neuze lakaat en a-raok interestoù an endro e-keñver reoù an ekonomiezh. E-kreiz raktres ar park emaint koulskoude. « *Un dachenn dreistordinal hag ur repu lec'hel eo ar PNMI* », a zispleg Frédéric Jean, rener Ensavadur Skol-veur Europat ar Mor, hag a zo e kuzul merañ ar park mor evel arbennigour barrek. « *Met a-wechoù ne vez ket klevet a-walc'h hor mouez, evel pa vijemp tapet en ur mor a interestoù dislavarus* », a zispleg ar skiantour.

Abae 2021 emañ Christophe Le Visage e kuzul-merañ ar park evel dileuriad Dour ha stêrioù Breizh. « *Asantet ez eus bopret bet raktresoù hag a zo noazus evit an endro, emezañ. Kontrol-mik eo ouzh pal kentañ ar park-mañ.* » Un ali a-du gant astenn ur c'hraou-moc'h e Plougonvelen a zo kaoz da skouer hag ivez ur **pempzek dirojañs bennak e-kerzh** an daou vloavezh tremenet evit skuilhadegoù hañvouez en takad e-lec'h m'eo difennet groñs hen-ober, hini ar vandennad 500 metrad e-tal kichen un tachad sevel kregin. Kuit da saotrañ an dourioù **ez eus bet graet ul lezenn strizh** evit sterniañ ar skuilhañ hañvouez rak re a nitrat a vez en dour abalamour da-se. **Dirojañsoù** a c'hell bezañ aotreet gant ar prefed hag ur votadeg a-du eus kuzul-merañ park naturel mor an Irwazh.

Baie de Douarnenez environnement n'emañ ket a-du gant ar mont en-dro nevez : « *Ral-kenañ e tlefe bezañ an dirojañsoù, mod-all n'eo ket dirojañsoù ken.* » Jean Hascoët, dileuriad ar gevredigezh-mañ, a zispleg deomp eo dre faot ar skuilhañ hañvouez ez eus kement a vezhin glas ha saotradur an traezhennoù e bae Douarnenez. « *Re alies e vez diferadoù-prefed o verzañ ar pesketa a-vicher hag amatour abalamour d'ar pistriennoù.* »

Gant an hini diwezhañ d'**an 23 a viz Ebrel** e oa bet « *difennet dastum ha debriñ kregin bae Douarnenez – aod-vev* » ablam d'al live re uhel a bistriennoù ankoun (ASP), produet gant spesadoù mikrobezhin hag a c'hell bezañ entoksekaet lemm an dud ganto. Hervez Jean-Alain Divanac'h, dileuriad kambr al labour-douar e diabarzh ar park-mor, vez gwellet o c'hresk a-gaoz d' « ur protokol nevez », o rediañ bremañ al labourerien-douar da ober ar goulennoù digoll-se. « *Graet hon eus koñsesionoù*

en ur asantiñ skarzhañ penn-da-benn an doareoù da skuilhañ etre 0 ha 50 metr », a zispleg kannad al labourerien-douar. Chom a ra ar riskl saotradur « poent-kenañ » hervezañ. Kavout a ra gwelloc'h lakaat ar biz war « rouedadoù yac'husaat n'eo ket diouzh ar reoladoù ».

Eus e du e laka renerezh ar park ar pouez war an araokadennoù a vez graet war an dachenn-se : « *A-drugarez d'ar c'hendivizoù-se eo bet digresket gorread an douaroù a c'hallfe bezañ skuilhet e-barzh 500 metrad eus an tachennoù sevel kregin. Digresket eo an holl zouaroù a-hed tro-dro d'ar park eus ouzhpenn 300 hektar da 111. Ar park en deus ivez embannet ur mennozh negativel diwar-benn raktresoù 53 hektar. »*

Sevel o mouezh a-enep an divizoù-se a vez graet gant ar c'hevredigezhioù difenn an endro. Padal e seblant bezañ un tamm disheñvel sell ar skiantourien, evel hini Eric Thiebault, kelenner war ar morouriezh biologel hag ezel eus kuzul-merañ ar park. Hervezañ « *n'eo ket talvoudus bezañ a-enep ar raktresoù bewech peogwir n'hon eus ket ar galloud da skoilhañ outo. »*

« *Kizidikaat a rankfer ober kentoc'h, evit chom efedus »*, emezañ. Keuz en deus ar c'hlasker e kreizenn biologel Rosko « *ne vije ket ur sell hollek »* war dalc'h ar skuilhañ-hañvouez : « *Data war ar flus enkas hag ar flus diskas a vefe brav kaout met n'hon eus sifr ebet diwar-benn 'se. »*

« *Evel skiantourien, n'eo ket simpl an traoù »*, a anzav Frédéric Jean. « *Diwar benn sujedoù sansupl, e c'hall hor mennozhioù bezañ komprenet evel bezañ a-du gant un abeg »*. « *Den ebet n'en deus ar muiañ-niver er c'huzul-merañ-se »*, a zispleg Fabien Boileau. Bet rener park naturel mor an Irwazh, e komz bremañ evel rener an takadoù gwarezet e Ofis Frañs ar vevliesseurtes. « *Ar parkoù naturel mor zo un ensav demokratelezh evit an endro, gant ur gouarnerezh lec'hel. Bodet e vez tud gant interestoù disheñvel a-wechoù, ar pezh a vez graet nebeut a-walc'h e lec'h-all »*, a zispleg-eñ. « *Gallout a ra ar park reiñ mennozhioù strishañ ha gwirioù veto war raktresoù zo. E giz-se e vez miret ouzh kalz disoc'hoù ekologel absurd »*, rak, hervezañ, « *ar mennozhioù-se a zic'hoanta an dud da gas raktresoù war-raok »*.

Met evit lakaat e obererezh da dalvezout penn-da-benn e ranker kemer e kont divizoù ar PNMI. War ar poent-se e oa bet studiet an afer gant Lez-varn Melestradurel Roazhon. Nevez zo e oa bet embannet gantan an ali a-du gant Eau et rivières de Bretagne, o kreñvaat, sañset, galloud park ar mor. **D'an 10 a viz Gouere 2025** e oa bet divizet gant al lez-varn e oa ret da prefed Penn-ar-Bed kavout asant park naturel mor an Irwazh a-raok aotren adsevel moc'h ha saout-laezh. Ar park, goulennataet war an afer, en doa roet un ali a-enep, ha ne oa ket bet kemeret e kont gant dileuriad ar Stad.

Analizoù ar riskloù pesketa : komite rannvroel barner anezhañ e-unan

Un dalc'h all a zo hervez Dour ha stêrioù : ur studiadenn analizañ ar riskl liammet gant ar pesketa a rank ober park naturel mor an Irwazh evit ma vefe anavezet resis

dilerc'hioù ar pesketa war an endroioù hag ar spesadoù a zo anavezet o mirout evel ret gant ar sturiadoù Natura 2000. « *Ar re a gemer perzh en dielfennadurioù-se a zo dreist-holl izili eus Poellgor rannvroel ar pesketaerezh mor : ganto e vez priziet e gwirionez hag-eñ eo bras o efedoù, hag e vez kinniget doareoù evit o digreskiñ* », eme Christophe Le Visage. « *Lakaet eo bet er-maez an dud n'int ket eus ar vicher pesketa, tud kevredigezhioù an endro da skouer. Dre-se e vez breskaet an disoc'h a-fet teknik ha war an dachenn lezennel ivez* », a zegas dileuriad Dour ha stêrioù da soñj. E 2006 en doa kemeret perzh hennezh e bodad-skrivañ an dekred evit krouiñ ar parkoù-mor pa oa kargiad evit ar Stad.

N'eo ket bet goulennet e ali kennebeut gant ar skiantour Eric Thiebault evit sevel ar studiadenn-mañ, 150 pajennad enni, hag a zo al lec'hioù-anez spesadoù mor danvez he lodenn gentañ. « *Met kenlabourat a ran war an eil lodenn hag a vo embannet diwar-benn ar spesadoù* », emezañ. Padal e chom kevredigezhioù an endro maez ar jeu evit an eil lodenn.

Goulennataet diwar-benn ar poent-se, renerezh ar park Mor a anzav c'hoant ar skiantourien hag ar c'hevredigezhioù da gemer perzh muioc'h hag e oa bet sur dezho e « *chomfent e-barzh an argerzh* » dre « *un emvod labour* ». An doare-ober-se, daoust ma vez rebechet dezhañ, a glot gant « *an doareoù lakaet da dalvezout evit holl renerien an takadoù mor gwarezet e Frañs* », hervez renerezh ar PNMI. « *Ne c'hellfed ober netra ma ne vefe ket degemeret ar besketaerien el labour-se* » a ro da c'houzout eus e du Fabien Boileau.

« *An demokratelezh lec'hel a ya en-dro gant kenemglevioù ha kempouezioù n'int ket aes da gavout atav* », a zispleg rener an takadoù mor gwarezet. Hervezañ eo an doare-ober-se un obererezh « *diplomatiezh* » evit « *kas an traoù war-raok* ». « *Ur c'hempouez a c'hell bezañ gwellaet bopret eo, ha chomomp aketus outañ* », a zispleg Poellgor Rannvroel ar Pesketaerezh. En ul lizher, 18 pajennad enni, hag hon eus gellet lenn, ez eus bet kaset gant Dour ha stêrioù ha Breizh vev (Bretagne vvante) meur a rebech ha meur a c'houlenn da vMaël de Calan, prezidant departamant Penn-ar-bed anezhañ, diwar-benn an danevell-mañ hag a zo bet arc'hantaouet gant Unvaniezh Europa. « *Lavaret e vez deomp ne servij da netra berzañ ar pesketa gant ur roued-stlej rak n'eus ket eus ar mod pesketa-se er park met ma n'eus ket eus outañ.* »

Ouzhpenn-se e lavar an div gevredigezh ez eus un diouer a c'houizidigezh war ar fed e chom lec'hioù-anez ar spesadoù-mor e stad vat pe get ha re nebeut ivez war ar c'hementad a besked hag a vezhin dastumet. Hervez ar studiadenn e vije an titouroù-mañ. « *Dindan sekred statistikel* ». « *Titouroù zo a vez gwelet evel kizidik adal ma c'haller anavezout war-eeun obererezh un embregerezh pe ul lestr* », eme ar Poellgor rannvroel pesketa.

Arguzennoù ha ne blijont ket dileuridi c'hevredigezhioù war dachenn an endro. D'o soñj n'eo ket ar rentañ-kont hervez lezenn pa ne zouj ket d'ar sturiad Habitats, faune, flore (DHFF) a sell ouzh al lec'hioù Natura 2000. Padal eo park mor an

Irwazh ul lec'h Natura 2000 just a-walc'h. « *O soñj mont dirak al lez-varn emomp* », emezo. E PNMI evel e lec'h all, pa vez ezhomm da ziskouez an demokratelezh, ne vez ket pell al lezioù-barn.



TAOL-LAGAD AR WIKIPEDOUR

Ar c'hehentiñ o klask en em silañ e Wikipedia

Merci de cesser d'introduire de force votre pub sur l'article. Le ton ne peut pas être aussi publicitaire. [TTSolitaire \(discuter\)](#) 9 janvier 2026 à 11:14 (CET) [Répondre](#) ...

Bonjour,
Nous mettons en avant le lancement d'un produit, sourcé par un article de presse sans autres adjectifs - il ne s'agit pas d'un ton publicitaire.
[Daunat \(discuter\)](#) 9 janvier 2026 à 14:46 (CET) [Répondre](#) ...

Bonjour,
A partir du moment où vous faites « de la mise en avant » de quoi que ce soit, à plus forte raison un produit que vous vendez, c'est de la publicité. [Le chat perché \(discuter\)](#) 13 janvier 2026 à 17:28 (CET) [Répondre](#) ...

« *Forzh petra a vez skrivet gant Wikipedia.* » Setu ar pezh a vez klevet ingal. Simplik eo an doare da welet an traoù ha n'eo ket gwir tamm ebet. N'eo ket traoù nevez a vez embannet e geriadur enlinenn ar ouiziegezh : lakaet e vez war wel ar pezh a zo bet skrivet e lec'h all dija hag e vez roet ar mammennoù eus kement-se e fin ar pennad. **Prinsipoù boutin** hag **ar c'hendiviz** a servij da anavezout « *ar mammennoù a c'heller kaout fiziañs enno* ».

E gwir, padal, e vez un takad griz war Wikipedia : abalamour da bennadoù keleier dizamzeriet, da gemennadennoù kelaouiñ ha da vammennoù hag a zo bruderezh tra ken. Ur skouer vat eus ar gudenn-se a gaver gant ar pennad diwar-benn **an embregerezh Daunat** produet ganti ar bara pok ha pok tri-c'horneg brudet. Lec'hienn an embregerezh eo unan eus ar mammennoù, kement ha mirout an doare da gontañ leun a veuleudi gant penn-lizherennoù bras : « *Hon Istor* » hag « *Hon*

Talvoudegezhioù ». Met splann eo evel lagad an naer ha tennet e vez buan ha diehan « *ar mamenoù kentañ* » gant izili a-youl vat ar skipailh Wikipedian. Ur gudenn all damm-heñvel : gant tud'zo e vez implijet pennadoù bruderezh, diaesoc'h da ziskuliañ, evel ar re embannet er mediaoù *LSA, L'Usine nouvelle, Linéaires* peotramant *Porcmag*.

Lakaat an titouroù diaezus e traoñ ar pennadoù Wikipedia eo pal an dud e-karg eus ar c'hehentiñ en embregerezhioù. Da skouer pa glask Daunat lakaat ar muiañ posupl diwar-wel ar bec'h a oa savet e 2018 etre 13 implijad oc'h ober harz-labour hag an embregerezh gourdrouzet e oant bet da vezañ skarzhet maez evit « *fazi meur* ». Peotramant ar pezh a oa c'hoarvezet e 2021 pa oa bet ur c'hastiz **a 9 milion a euroioù evit « emglev », gant Aotrouniezh ar c'hevezañ.**

Implijout pennadoù embannet gant ar c'hazetennoù pemdeziek lec'hel n'eo ket kalz gwelloc'h pa reont ingal ur seurt bruderezh d'an embregerezhioù : da skouer e vez skrivet alies gant **An Télégramme** pennadoù war ar mod enfredañ a vez gant Daunat, diaes dezhi kavout labourerien da vare an hañv. Souezhusoc'h c'hoazh : petra zo kaoz ez eus bet ur pennad kelaouet mat, skrivet gant ur gazetennerez eus Ouest-France Gwengamp (**hag a gont istor dreistordinal ur vaouez, 58 vloaz anezhi, kavet ganti labour en-dro**), kinniget evel ma vefe **ur pennad embannet er Midi Libre** ? Abaoe 2019 ez eus diaesamantoù ekonomikel gant ar gazetenn-se eus departamant an Hérault ha lakaet maez ganti kalz a gazetennerien.

Un diskoulm a zo bet kavet ganti evit embann traoù en un doare kazi-digoust : bemdez e vez aozet betek 9 « *fennad-skrid* » gant ur stajiadez e servij « *desk internet* » **Midi Libre**. Ganti e vez eilskrivet pennadoù embannet e kazetennoù lec'hel all hag ouzhpennet fotoioù dieub o gwirioù. Estreget Wikipedia a rank plediñ gant dalc'h ar « *mamenoù fiziapl* », me lâr deoc'h !

DASTUMET EVIDOC'H




👉 **Efed hon enklaskoù.** Kalzig a draoù a zo c'hoarvezet da-heul hon diskuliadennoù diwar-benn **an 3.000 litrad a broduioù kimiek skuilhet war al leur e mein-gleuz Imerys e Groñvel (22)**. Un enklask a zo bet digoret gant prokulerezh Sant-Brieg evit « *bezañ skuilhet en dour, dre wallañ al lezenn, o produiñ efedoù drastus ha padus evit ar yec'hed, ar plant hag al loened* ». Meur a zilennad en deus lakaet ar gaoz war ar sujed-mañ ivez. Maer Groñvel da gentañ, koulskoude n'eo ket anavezet evit sevel e vouezh a-enep Imerys : **lakaet en deus da votiñ** a-unvouezh un dirouestl evit « *goulenn* » titouroù digant an embregerezh Imerys diwar-benn ar saotradur diskuliet. En ul lizher kaset d'ar 1añ a viz Ebrel gant prezidant Rannvro Vreizh, Loig Chesnais-Girard **en doa goulennet digant prefed ar Rannvro** « *heuliañ pizh stad metoù naturel dre ur programm analizañ* ». Eus e du en doa lakaet Emmanuel Macron un tok Imerys war e benn evit **mont da weladenniñ danvez tachad a zeu an embregerezh liesvroad, e departamant an Allier**, e-lec'h e vo tennet litiom. Lakaet en deus prezidant Bro-C'hall war-wel « *iliz-veur an industriezh hag a ro urzh da emrenezh ar vro* ».

🌿 **Heritaj pistrius.** Ledanaet e vo evezh Air Breizh war al « lindan » e Roazhon. E-pad pemp miz e vo muzuliet gant kaptorioù nevez ma vez an diamprevaner-mañ anezhañ en aer e karterioù zo, **hervez Ouest-France** en ur pennad embannet e Miz C'hwevrer. Abaoe 1998 eo anavezet evit kañserogenek evit an dud ha difennet el labour-douar. Koulskoude e veze implijet e liorz an Thabor gant un tolpad a 0,25 ng/m³ e-pad ar bloaz e 2023 evit an tolzennadoù bleunioù. Aet eo ar rekord ganto hervez taolenn **PhyAtmo Dataviz**, lakaet enlinenn e fin miz Meurzh gant Atmo France. Lakaet e vez da anavezout gant an ostilh-mañ ar stadoù « *evezhiañs* » met n'eus mann ebet en deiz a hiziv evit reolenniñ ar feurioù a bestisidoù en aer.

😄 **Stad an traoù.** Er raktres lezenn mallusted al labour-douar ez eus ur pennad hag a zo e bal termeniñ ar muzulioù kempouezañ diwar-benn distruj an takadoù gleborek « *distreset* » dija. Deoc'h da zerc'hel soñj int a-bouez, o virout ar vevliesseurtes hag o tiwall diouzh ar sec'hder. Breskaet eo an takadoù gleborek dija gant mod da labourat kendiviz al labourerien-douar ha cheñchamant an hin. Setu un « *doare da gemer e kont stad an traoù gant ur sell realour* », tra ken, hervez ministrerezh al Labour-douar. Aesaat ar raktresoù sevel megabasinoù ha dourañ a vez kinniget gant al lezenn-mañ ivez. Ha pa ranker tremen hebioù reolennadurioù termenet evit Brastes terkañ ha merañ an dourioù (Sage) memes, ha ne veze ket moaien d'hen ober a-raok. Breskaet eo demokratelezh an dour hervez **displegadennoù Reporterre**.





📺 **Toull-trap er Vonreizh. En un toull-trap** e oa kouezhet ar gevredigezh Quota Climat d'ar 26 a viz Meurzh 2026. Klasket ez eus bet gant ar gevredigezh Association française pour l'information scientifique (Afis), Ruggy, Buzin ha Woessner « prouiñ » e vije fall ar c'heleier skiantel war ar chadennoù publik. Ar c'hontrol-mik eus pezh a zo displeget er studiadenenn Quota Climat. An doare : Lavaret **kozh kaozioù, lakaat an dud da zouetañ. Ha chom hep pediñ kazetennerien skiantel dreist-holl**, evit ma vefe sinet un tribun heugus embannet er gazetenn *Le Point*.

 **Nikel-krom.** N'eo ket bet kelaouet annezidi ar gumun Indre (44), 10 kilometr eus Naoned, met riskloù bras o deus da dapout krignoù-bev 'zo **hervez Nicolas Cossic en un enklask embannet er media Reporterre**. Dir a vez produet gant an embregerezh Arcelor Mittal evit produiñ pakadurioù boued ha skarzhet e vez kement a feur a grom VI « *hag a zo uhel eston* ». Koulskoude eo anavezet evel kañserogenek abaoe 1990. 13 gwech muioc'h a vez kaset en aer gant ArcelorMittal evit un uzin heñvel outi e Bro-Spagn. Maer ar gumun zoken n'en doa ket klevet kaoz eus an dra-se a-raok.



Bremañ e vez moulet hon enklaskoù bras ganeomp ha setu, e c'haller kavout an teir hini diwezhañ war baper.

Levrigoù divyezhek a ro tro deoc'h da vont don e-barzh peder eus hon enklaskoù :

-  Ar gennad prevez oc'h ober e doull el liseoù labour-douar ;
-  Ospitalioù publik : un distrij programmet, ur marc'had evit ar gennad prevez ;
-  Aodoù breizh, temptadur betoñs en arvor ;
-  Mengleuzioù pistrius e Breizh.

Prenan a ran ul levrig

[Atersadenn] Nicolas Legendre : « An agro-industriezh zo aozet e-giz un arme ha kas a ra un doare brezel labour-douar »



Gant *Violence dans les champs*, e kendalc'h Nicolas Legendre da zifilochiñ a-dost ar patrom agro-industriyel gall. Ur « *sistem prenet* », gant ur mont en-dro « *taer* », hag ar c'hazetenner en deus divizet gouestlañ an teulfilm d'an dra-se, e stumm un heuliad d'e levr *Silence dans les champs*. A-raok na vo skignet, d'ar Sul 3 a viz Mae war France 5, e respont d'ar goulennoù savet outañ gant *Splann !*, media enklask, hag ezel eo-eñ anezhañ.

Splann ! : Penaos e tremener eus skrivañ ul levr-enklask e-pad seizh vloaz da seveniñ un teulfilm 70 munud ?

Nicolas Legendre : Ur c'hammed luziet a-walc'h ha kalz labour eo bet. N'ouzon ket ma 'm bije gallet en ober hep sell na skiant-prenet Magali Serre. Magali zo boas gant furmad an enklask evit ar skinwel. E-keit ma oamp o seveniñ *Violence dans les champs* en deus graet vad he sell din. Ha just a-walc'h, peogwir en deus graet vad he sell din, en deus roet tro din da vont er-maez eus ma zammig savboent ha da ledanaat ma zamm preder a-fed labour-douar da live Frañs ha n'eo ket d'al live breton hepken... [...]

[Klikit amañ evit lenn ar pennad a-bezh](#)



TRO-DRO DEOC'H

Gant *Splann !* e vez renablet bep miz un darn eus ar raktresoù a-bouez a zo war an tiriad, da lak an dud da gemer perzh en tabut foran.

Lostachoù

Terrug (29). Gant an embregerezh Kerspern TP e vez miret lostachoù abaoe meur a vloavezh en anv-lec'h Lintan. Dont a reont eus e chanterioù ha lakaet int da c'houde evit azezañ chanterioù liesseurt (lec'hioù parkañ, savadurioù, hentoù...). Ar stokañ lostachoù a rank reizhekaat. **Kuzuliadenn foran** etre an 11 a viz Mae hag an 8 a viz Even.

Plozeved (29). Un astenn eus e unvez fardañ rotel a blijfe ober an embregerezh AC Campeon evit ma vefe rotelet fank ar purlec'hioù kêr, industriezhioù agro-boued hag uzinoù produiñ dour mat da evañ. **Kuzuliadenn** betek an 13 a viz Mae.

Dour

Vitrè / Gwitreg (35). Ur raktres etre ar c'humunioù douget gant Gwitreg Kumuniezh-kumunioù a zo evit tretañ an dourioù lous er gumun Kastell-Bourc'h / Châteaubourg. **Kuzuliadenn foran** etre ar 4 a viz Mae hag ar 4 a viz Even.

Kêraozañ

Pont-'n'-Abad (29). Kentenklask publik diwar-benn an disklêriadur a laz foran raktres sevel an Takad Armerzherezh (ZAE) Le Sequer/Kerargont. Krouiñ un ZAE e Pont-'n'-Abad eo ar pal, evit degemer embregerezhioù hag ur c'hrematorium. **Enklask foran** betek an 9 a viz Mae.

Labour-douar

Plouenan (29). Raktres sevel daou di-gwer en anv-lec'h Kerivoas gant an EARL Panier Gourmand / EARL de la Rocade. **Kuzuliadenn foran** betek ar 1añ a viz Even.

Prad (22). Kreskiñ e vagerezh-voc'h evit magañ div wech muioc'h a benn-moc'h (2.656) kevatal, sevel savadurioù nevez ha modernaat e gorvoiñ a blijfe da SARL Peuplier. **Kuzuliadenn foran** betek an 12 a viz Mae.

Noyal-Châtillon-sur-Seiche / Noal-Kastellan (35). Kreskiñ gouested tretañ unvez vetanaat en anv-lec'h La Jousselinais gant an embregerezh SARL Castelmetha. **Kuzuliadenn foran** etre ar 4 a viz Mae hag ar 5 a viz Even.

Energiezhioù

Logivi-Plougraz ha Plougonveur (22). Goulenn diazezañ ha korvoiñ raktres avel-dredan Parc Ar Hoat gant teir rod-avel e kumunioù Logivi-Plougraz (div rod-avel) ha Plougonveur (unan), en Aodoù-an-Arvor, gant an embregerezh Eg parc ar hoat hag a zo dalc'het da 70 % gant Engie Green ha da 30 % gant ar SEM Lannion-Trégor. **Kuzuliadenn foran** betek an 20 a viz Gouere.

Plouared (22). Kreskiñ e unvez vetanaat ha mont eus 14,7 tonenn da 50 tonenn bemdez. « N'eo ket bet priziet an efed a vije war stad metoù naturel tro-dro » gant an dalc'her raktres, hervez ar MRAE. **Kuzuliadenn foran** betek an 18 a viz Mae.

Greanterezh

Bain-sur-Oust (35). Kreskiñ an traoù ha bodañ an holl obererezhioù e Bains-sur-Oust eo raktres an embregerezh Adeos. Produet e vez akiperezhoù metal evit embregerezhioù eus gennad an energiezh, Enedis en o zouez. **Kuzuliadenn foran** betek an 11 a viz Mae.


Petra zo da zont gant *Splann* !

D'an 21 a viz Mae - Montroulez. Nozvezh tro-dro d'an tem **Les Voix des champs** adalek 6 e 30 noz. Ur stand *Splann*! a vo, ur sonadeg *Fourches / Silence dans les champs* tennet eus levr Nicolas Legendre da 9e15 noz. Un tabut a vo da c'houde, meret gant Kristen Falc'hon, kazetenner *Splann* !.

D'an 21 a viz Mae - Sant-Riwal. Skignadenn ha kejadenn tro-dro d'an estennadurouriezh. Film *Béhémot - Le dragon noir* heuliet gant ur gejadenn gant ar gazetennerez Celia Izoard. Adalek 6 eur noz er **Baraque Méharées**.

D'an 24 a viz Mae - Rostrenen. **Gouel Diskord**, stand *Splann* ! er marc'had an dud dizalc'h etre 11 e ha 5 eur goude merenn er Garaj Duro.

D'an 30 a viz Mae - Sant-Nazer. « Industriezh, labour, yec'hed : sindikadoù ha kevredigezhioù o labourat asambles pe get ? », tabut kaset da benn gant Samy Archimède, kazetenner e *Splann* ! er Galerie des Franciscains : 2 eur - 6 eur goude merenn, dieub.



**AR PAL : 1.000 SKOAZELL MIZIEK
AC'HANN D'AN 31 A VIZ KERZU**

A-drugarez d'ar pezh a vez roet ganeoc'h e c'hallomp kas da benn enklaskoù dizalc'h, hep bruderezh, nag arc'hant embregerezhioù bras. Ma vez paeet tailhoù ganeoc'h e c'hallit tennañ diouto div drederenn eus ar pezh a zo bet roet ganeoc'h da *Splann* !. **Da skouer, pa roit 100 € ne vo paeet nemet 34 € ganeoc'h.**

Reiñ a ran



Splann !

Ti ar vro, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Prientet eo bet al lizher-kelaouiñ gant Manon Deniau, Kristen Falch'on, Sylvain Ernault, Pierre-Yves Bulteau ha Faustine Sternberg. Poltridi : Sophie Laot, Vivement Lundi !, Jean Leveugle ha Denoël Daniel.

Koumanantit d'hon c'heleier

En em zienskrivañ 🥲

Rannañ a ran *Splann !* gant ma zud nes